

# DA HERY PEMP



*Evid ha reno prim Hery pemp gwir Rouez  
Pedomp holl ar Gwerc'hez hag he Mabik Doue.*

---

## 1.

Deoc'h goude Doue ha gleomp holl senti.  
Bed Deoc'h gant leron Drouk lakeet e-mez ho ty,  
Aboue omp bro kez deuz kollet ar iec'het,  
Gant meveillen an diaoul eo bed bulumet,  
Deut rak-tal Rouez mad astennet dim ho dorn,  
A Digaset ann an goude ar gouan skorn.

## 2.

Ebarz kreiz ar poull fank pel a zo omp koueet  
Tolet omp bed enn an gant eur bern jalodet  
Ho zad ann drouk-speret a zo tad ann holl gaou  
Gwerza ra aliez billy tan evit kraoun  
A togo touseged evid gwastel gwiniz  
Laerez ha ra ann holl everien hag hostis.

3

Pa lakaas Eva e dorn war an aval,  
Ha c'houie gwir ha krak a re enn dra gwel fall.  
Ar pec'het roas deil eun tol spontus ha strons,  
Ann aval a gouea kerkent enn eun plonsan.  
Nim~~z~~ zo bugale diwar enn tam yac'han,  
Ar republicanet a zo diwar ar blons.

4

Bez a zo pel amzer ziuaz evit omp holl.  
Emaign evel moc'h goue ho porc'helli ar vro,  
Kassomp anez rak-tal fonnuz diwar omp zro,  
Rak gant he a viskoaz n'ha meump bed nemed koll.  
Tud hag a deus, ann tu vit boeta ann higenn,  
Tamo krak aoutronez ha deus c'houez ar kigen.

5

D'han tud diwar ar mez ha reont d'ha kridy,  
Eur bern komchou zod naill, ar braza marvailou,  
Evel ar groagez koz lar'dar bugaligou.  
Evit ho zerc'hel kleink enn noz ebarz enn ty,  
Ma roet ho mouezou d'eur Nop pe d'eur Beleck,  
A po noz de d'ho heul eur loen du naouch.

6

A deufet kam a tort a posleic'h a kromet.  
Koll a refet ho nerz, koll a refet ho ialc'h,  
Deuz ho dorn a kouezo hag ar bal hag ar fale'h,

N'ha po tam peuc'h ebed, n'hag er park n'hag enn ty,  
War ho tal vo laket oc'h enn den milliget,  
A gwir, a dioano plu wrann war bek ho fry.

7

M'ha c'hallfe ann diaoul terri, he stagadur,  
Rena war enn tud kez a kemer krog er stur,  
Evel a deuz c'hoant braz ar republicanet,  
E ben enn tam amzer; amzer eur c'hornedet,  
Ar bed holl a vige malet a luduet!!  
Pa c'hefet da voti, mignonned bed gwall fur.

8

Gir eunn den o pet song, zo koc'henn e ine,  
M'ha c'het d'he lousad enn hostilliriou,  
M'ha gwerzet anez hi evit gwenegadou,  
A rofet ho mouez d'eur marmouz fall bennag,  
Hag he oberiou drouek war ho kein a vo stag.  
Voted evit tud mad, tud a doujans Doue.

9

Merc'h hena ann Illis, ar France, omp bro omp mam,  
A zo gwel izelet, bed a deuz eur gwel lamm.  
Kerzel a re soun, yac'h, gant, ar rouez gwechall,  
Hirie mam a dribill war lerc'h ar broio all.  
Ar votadek kenta c'hall disaman ar bro,  
Evel c'hall rei d'ezhi ive, strous ar maro.

10

Devez ar votadek eo ar iar here,  
Ann hini ha had drok a ve bihan he vleut,  
Enn he zi ar billik a deuz c'houez ann treut,  
M'a kaset kanfardet vit ober lezenno,  
Diveed vo d'ha klem, d'ha klask eunn digare,  
C'hoariet vo ann taul, a iennet vo Guillo.

11

Arry omp er poull du zo barz porz ann ifern,  
Diaoulou he enn c'hourzin zo dent e mez a vern  
Gant ann drouk sperejou pel a zo omp kaset.  
Skoulma ra ann dour brein war omp ziskoaz louset  
Hastomp ober distro souzomp rak-tal souzomp,  
Point bras eo pidi, ia ma zud mad pedorap,  
D'ha goulenn vit omp bro d'ha vadelez Doue,  
Domp bro (1) emzivadez, eunn tam sell a true.

Adrien RAISON DU GLEUZIQU.

Août 1877.

(1) Minorez